



BREZELL AR CHIN

HAG ANN TONKIN

Ton : *Guerz ann Tunisi, pe Ar Serjant major.*

Me a zo breman pedet, gant tud a Vreiz-Izel,
Da zavel eur werz neve divar-benn ar brezell
Zo tri bloaz zo digoret 'tre ar Frans hag ar Chin,
Ha da genta e sounjet ne oa 'met ann Tonkin.

Abalamour a renkann tamall h' gouarnamant,
Enn eur zavel anezhi em euz kalz nec'hamant.
Ha kouslkoude a renkann 'laret ar wirionez,
Diskullia he droiou kamm gand he fallagriez.

Ar c'hommandant a Rivier, gand he holl zoudarded,
Zo het, dre drubarderez, ar c'henta oa lazet,
Hag ann admiral Courbet a c'houlenne neuze,
Mont gand he vartoloded da reiz a ann dud-se.

Dek hag ugent a gontet a oa o vrezelli,
War tachennou ann emgann a eneb pep hini :
C'hoaz ho dije ho lazet, hep damant, na truez,
Panefe Julik Ferry gand he goupagnunez.

Ferry, gand he vinistred, 'lare d'ann amiral :
« Arabad 'be didruez, gwelloc'h ez eo gedal ;
« Na gand aoun ma ve brudet hon defe-ni brezell,
« A ve gret d'eomp dilezel hor boued hag hor rastell. »

Ann admiral a nevez d'ezho a lavare :
« Enn han' Doue, hon lezit da skoï prim ar re-ze ;
« Emaint oc'h ober forchou, o teski soudarded,
« Va-unan'm bo ket awalc'h, eur wech vint grouiennet. »

Ar vinistred, o klevet neuze eur seurt kelou,
A iee drouk ruz enn-ho, 'guze ar paperiou,
Hag e kuz glaske eunn all dont di da vrezelli,
Eur republican touet, eur mignoun da Ferry.

Soudarded, martoloded a oe roet da hema,
Gand urz da ober brezell hep dont d'he ziskleria.
Koustet eo d'eomp pemp kant lur kas peb un anezho,
Ar pez hon euz gounezet, chom 'velze da c'horto.

Epad ma oar evelze, o testumm soudarded,
Ar Chinoazed hep ehan ho devoa labouret.
E-giz-se pa erruaz heman 'barz en Tonkin
Euz a-berz ar Republik, ar Chin re 'met c'hoarzin.

Soudarded, martoloded, out-han holl a zente,
Admiral, jeneraled zoken a renk bale.
Mes, hen oa ken diskiant ma kollent aliez,
Dindan he c'houarnamant frouez poaniuz eur bloavez.

E Frans, ar c'hazetennou skriv holl eneb d'ezha,
Ker kouls hag eneb Ferry, penn-kaoz a gement-ma,
Hag evit kaout peoc'h diout-ho neuze 'r gouarnamant
Choazaz da ober brezell eur jeneral vaillant.

Admiral, jeneraled holl a boanient neuze,
Martoloded, soudarded, pep hini laboure,
Hervez ho nerz, ho iec'hed, a skoent ho zoliou,
Ma goueze ho enebour dindan-ho a verniou.

En despet da gement-se, ar vistri a wele
Hiniennou euz hon tud o vervel goulskoude :
Darn anezho gant klenvet, darn all ive lazet ;
Ar pez 'lavare d'ezho nn' doa ket 'walc'h soudarded.

Skriva rejont a neve a renkent kaout sikour :
« Abalamour, emez-ho, kre eo hon enebour,
« Ha dre leac'h ma tremenomp, 'renkomp lezel goardou,
« Pe e welimp hep dale troc'het d'eomp hon henchou. »

Mes, d'ezho ar vinistred demeuz ho falesiou,
Karget mad gantho ho c'hof, arc'hant 'nn ho godellou :
« N'e ket sikour, emezho, lavaromp d'e-hoc'h goulenn ;
« Monet ato war araok, flastra 'nn eneberourien.

Mistri keiz ar zoudarded, boazet ouz ar vizer,
Enn eur lenn eur seurt respount a c'hlibe ar paper ;
Hag a zelle truezuz ann eil euz egile :
« Ama gollfomp, emezho, hon arme, hor bue.

« Red mad ez eo d'eomp senti ; koll a raïmp koulzkoude ;
« Alo ! hor zoudarded paour, baleomp, enn han Doue. »
Neuze vad e oant gwelet c'houezi ann dour, ar goad ;
O vale ken kalounek, 'vit ober eur c'hrogad.

Eur wech ma oant erruet gand ho enebourien,
E ziszonchont ho skuizder, didruez e skoent ;
Ha nikun bet anezho euz he gorf 'nn doa damant ;
Kiza renkchont e Lang-Son, kaer doa beza vaillant.

Ar jeneral Negrier oa eno gouliet,
Ha tud a zo a lavar oa pempzek kant chomet,
Etre lazet, gouliet war tachenn ar brezell,
Ha donet prim war ho c'hiz pa n'hellent mui herzel.

Ar jeneral Brier de l'Isle a skrivaz da Paris :
« Ama n'euz kollet, siouaz ! despet d'ar vaillantiz,
« Ho deuz sur holl diskouezet, hep gaou, hor zoudarded ;
« Mes ho niver re-vihan zo kaoz m'int bet trec'het. »

A-boan oa anavezet hon doa kollet eno,
Euz ar vinistred brema ar bobl c'houl ar maro.
Rak gouzout mad a reent oa goulennet sikour
Gant mistri ar zoudarded da vont d'ann enebour.

Dre m'ho devoa bet outho ar brezell ma kuzet,
Int bet kaset da vale gand ann deputeed,
Ha dioc'h tu ar vinistred oa 'met al lakichen
A gar, gwelloc'h koll ho bro ; sikour he muntrerien.

Be oa a du gant Ferry, Arnould, Hemon, Guyho,
Betek Caurant, Camescasse, gant Gueguen ha Rousseau.
Dizenoret ho deveuz sur hon departamant,
O tifenn sunerien goad, dispignourien arc'hant.

Tri offiser kalounek a gollomp enn Tonkin
Gant eiz mil soudard iaouank o vrezelli ar Chin.
Ouzpenn pemp kant million enn arc'hant dispignet
Ha gwella admiral Frans, Courbet a zo marvet.

Ar peoc'h larer zo sinet ; koulz koude 'nn em ganner,
Epad skrivann va c'hlemmou, ama, war ar paper,
'Vit ho pedi, Bretouned, da c'houlenn ouz Doue,
Ma ehano ar brezell eno 'vit hon arme.

Pe ma renkонт brezelli, gras d'ezho da drec'hi
Hon enebourien kruel, dre-ze dlefemp pedi,
'Vit ma zeufint dibistig d'ho cheriou hep dale
Da zec'ha daelou ho zud, wel d'ezho marteze.

Martoloded, soudarded holl ho meulomp ama,
Dre m'ho deuz gret ho dever eno euz ar gwella,
Ha ma vijent bet losket gand hor gouarnamant
Oa pell zo fin d'ar brezell, arboellet kalz arc'hant.


MIKEAL QUEINEC.



TRIOUEC'H DEN BEUZET

ETRE DOUARNENEZ HA TREBOUL

D'ANN NAONTEK A VIZ DU 1883



Tud Breiz-Izel deut da glevet
Eun darvoud nevez erruet
E-kichen kear Douarnenez !
Klevit anezhan gant evez.

D'an naontek demeuz a viz du,
Da zeiz heur, tud a ouele dru,
O welet ar mor kounnaret
Daou war-n-ugent enn-han kouezet.

Eur goaz, eur vaouez war-n-ugent,
Pignet er vag evit tremen
Euz Douarnenez da Dreboul,
Gant re a hast hag a fistoul.

Ar vag gant-ho oa re garget,
Ha da ziskenn oant bet pedet,
Ne sentent ket oc'h an treizer,
War ho menno 'doa ket amzer.

War an taol, teuaz eur wagenn
D'ar vag dro tu kreiz an eonnenn
A stlapaz an dud keiz en dour,
Hep eur c'hristen 'vit ho zikour.

Seitek maouez gavaz eno,
Siouaz ! d'ezho holl ho maro ;
Gant eur goaz zo ive beuzet,
Pedir hep-ken oe saveteet.

'Vit Trebouliz na pebes nec'h
Pa glevjont oa beuzet triouec'h
Euz ho zud paour chomet en dour,
N'eur vont d'ar gear dioc'h ho labour.

O nozvez du, kri ha tenval,
Biskoaz n'euz gwelet kement-all,
Tadou, mammou klask ar c'horfou,
Beuzet holl ebarz n'ho daëlou !

A bep tu na glever 'met kri,
Ar priejou o hirvoudi
War ho fried ho deuz kollet,
Hag ar vreudeur ho c'hoarezed.

Kaloun an den fraille 'n he greiz,
Pa welaz goude an dud keiz
O vont, siouaz ! dre an hentchou,
Skuiz braz o tougen ar c'horfou !

Hanoiou an dud zo beuzet,
Verker ama, ma vo pedet,
Gant ar re vad, 'vit-ho Doue,
Da rei barados d'ho ene.

Eun den a nao bloaz ha tregont,
Iann-Nouel Priol, en hanvont,
Gant he vreg Mari-Anna ar Bars
He c'hoar Mari chomet ebars.

Madalen Joncourt, greg Jannic,
Gant he c'hoar oa hanvet Maric,
Catel Peherin eno varvaz
Gant Margrit Celton greg Thomas.

Gwelet rer ive er maleur
Siouaz ! Fransesa Lozac'hmeur,
Gant Catel Divanarc'h, seitek vla,
Eur c'hoar d'ezbi, Mari-Anna.

Beuzet a zo bet c'hoaz ouspenn,
Da naontek vloaz, Margrit Lenguen,
Gant Mari-Yvonn Lagadec,
Mari-Josephin Kervarec.

D'he c'houezek vloaz, Mari Moreau,
O ! va Doue, gaver maro
Gant Mari-August Kerivel,
'Vid-omp-ni holl eo eur gentel.

Dioc'h Mari-Catel Boudigou,
Na glevo den mui ar c'homzou,
Nak euz Jann-Yvonn Bannalec
Zo maro d'an oad a bempzec.

D'he fempzec vloaz Fransesa Coz
Zo maro c'hoaz e-kreiz an noz,
Hag euz a zaou zen war-n-ugent
Pedir hep-ken c'hellaz n'em denn.

D'ar merc'her a ioa nec'hamant
E Treboul 'n ho enteramant ;
O velet kement a gorsou,
Tont d'an iliz gant an hentchou.

Daou enterramant a zo bet
Eno evit an dud beuzet ;
Seiz korf a oa 'barz ar c'henta,
Eunek en hini diveza.

Da Zouarneneziz, Trebouliz,
Voa kalz re-vian an iliz,
Pere oa deut holl a vandenn
Da gass da Zoue ho fedenn.

Pegen trist oa eta gwelet
Triouec'h bez, kleuzet er vered,
Klevet ar c'hri, an hirvoudou
Hag an holl o skuilla daëlou.

Ar vamm glevet o lavaret :
— « Perak va merc'h m'euz da vaget ?
« P'ho kuelann laket en douar
« Ha me koz hag hirio hep kar ! »

An tad ive o hirvoudi :
— « Perak velann-me em c'hozni ?
« Kuzet aze ebarz er bez,
« Siouaz ! d'in-me va merc'hik kez ! »

Ar pried he galon rannet :
— « Perak ne vijenn ket marvet ?
A lavar-hen enn eur ouela
D'he vugale en dro d'ezha.

« Setu ho mamm, bugale geiz,
« Beuzet o klask treuzi an treiz ;
« Sellit, ma aze dilavar
« Kousket en he guele douar. »

Ar vugale bianik tre,
O klevet ho zad a lenve :
« N'on euz mui mamm ebet er bed,
« Mervel a gredomp a vo red. »

O klevet, velet kement-all,
An dud n'em lakaz da grial,
Rak ar c'hosa den er bed-ma
Tristoc'h biskoaz na velaz tra.

It, kristenien holl da bedi
Evit an dud-ze n'emaint-mui,
N'hor pedenn gullomp ouz Doue
D'ezho bep a blasik enn Ee.

Martoloded lakit evez,
Da c'houlenn bennos aliez
Digant Doue, mestr ar mor glaz,
Rak bihan ho pag hag hen braz.

D'ar Werc'hez, da Zantes Anna,
Na skuizit morse o kana,
Pa vezo stignet ho roejou
War vor dindan bolz an envou.

Grit ho teveriou a gristen,
Hervez zeu Doue d'ho goulenn,
Dre hor mamm zantel an Iliz,
Enn Env ho pezo pep diskuiz.

(Tous droits réservés.)

